



# DISPUT

ETRE UR VAM HAC HE MERCH

PEHINI A FALIE DEZI-DEMEZI

DA EUR ZOUBARD PE DA EUR MARTOLOD.

Var un ton joais.

AR VERC'H.

**V**a Mam, va demezit, me gar oll tud ar Roues  
Va Mam, grit an drase,  
Me a gar an arme:  
Charmet eo va c'halon pa glêvan tambourinou,  
Pa velap ar rejimanchou:  
Aneze emeus c'hoant  
Da choaz un den yaouanq.



AR VAM.

Va Merc'h, m'èurbet oc'h sot da zozjal en'ar meo,  
An dud a barlanto,  
Hã chagrin o pezo;  
Hep e sonjot eu drouc, sur e vezo lavaret :  
Homa gant ar Zoudardet  
Hag an oll dud a vor,  
A gollo he honor.

AR VERC'H.

Coññet nep a garo; laq'et emeus em speret  
Carer an dud a vor,  
Ar re-re o deus honor.  
Ea instant ma o gaelan, e rejouis va c'halon;  
Eno em va tignou :  
Aneso emeus c'hoant  
Da choas un den yaouank.

AR VAM.

Va Merc'h, en amzer-mañ n'estimer qet ar plac'her  
A dal ma vent guelef  
O come gant Soudardet,  
Balamour d'o habit, pehini zo scandalme,  
D'ar merc'het qea danjerus :  
Dionallit oc'h honor  
Eus an oll dud a vor.

AR VERC'H.

Va Mam, an dud a vor a zo tud rejouisset,  
Merchid, Soudardet,

A pontant va speret;  
 M'en em fize qent enno vit en un den souebet,  
 Godiserien ar plac'bet;  
 Apezo emens c'hoant  
 Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, me gafe guell dec'h caout un den a vicher,  
 Bourc'his pe buysant,  
 Intron pe den yaouanq.  
 Lesit an oll dud a vor, chassait-y eus ho speret,  
 Pe e viot disprizet  
 Gant an oll plac'bet all,  
 Ha laqet un den fal.

AR VERC'H.

Va Mam, ar botret vras e servich ar Roue;  
 Mar dint potret vaillaht,  
 E zeont isessamant  
 D'an arme, p'o goulou, ret e deo choissa,  
 N'o deus gard da rezista,  
 Hag apezo emeus c'hoant.  
 Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, ar Zouardet coulz hag ar Vartoloded.  
 A ra rejouissanq  
 Gant arc'hant ar Roue Franc.  
 E fin o c'hampagnou e zeont d'an hostaliri,  
 E vit en em antreteni.

4.  
Da foueta o frusqia.  
Va Merc'h, oc'h eva guin.

AR VERC'H.

Va Mam, hac e ve guir ec'h effent peb a vanne  
Evit en em récrei,  
O deus poan hag anui.  
Pa vezont var ar mör, int exposet en danjer,  
Ha da bep sort mizer:  
Anezo emeus c'hoant  
Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Mar o pe bugale, va Merc'h, pa viot demezet,  
Soudard pe Merdead,  
Ho rento miserabl:  
En a yêlo en campagn, hac e viot dilêzet,  
Setu c'houi abandonet,  
Poan o pezo goude  
O vaga ho pugale.

AR VERC'H.

Hag em be-bugale, va Mam, mar bezont potret,  
Evel ma vint savet  
Ezint da Zoudardet,  
Pe da Verdaïdi, da redec an armeou,  
Evel ma ya an troupou;  
Eus an arme emeus c'hoant  
Da choas un den yaouanq.

## AR VAM.

Va Merc'h, c'houi zo yaouanq, n'oc'h eus nemet  
pempzec vloas,

Abredic mat oc'h c'hoas

Da g'emeret eur goas.

Eun daou pe dri blavez e false din diferi,

E chomfac'h hep demegi.

Neuze e ven'contant

E qemerfac'h ho c'hoant.

## AR VERC'H.

Va Mam, an exersic, ar sifr, an tambourinou,

An oll rejouissanc

A arme Roue Franç,

A laqa va speret da garout ar Zoudardet,

Hag ar Vartoloded;

Bremàn, e renqàn choas

Eus an arme va goas.

## AR VAM.

Torit eta ho c'hoant, 'ha choasit ho fantazi,

Soudard pe Vartolod,

Va Merc'h, evit ho lod,

Pa zeo-guit an arme a ra dec'h rejouissanc,

Hag oc'h oll pasetanc,

Criomp, gant calz a joa;

Mon diou : VIVE LE ROI

FIN.



S O N  
H E R R I - P È V A R ,  
R O U E A F R A N Ç .



Vas ton : *Vive Henri-Quatre !*



**N**A pebes Roue.  
Eo bet HERRI goechal !  
Coulz a ell bale ;  
Mes nican en ta all

Ne velot morze  
En Franç nac e lec'h all.



Ar Roue HERRI  
A voa eur pot dious-tu,  
A garrie hardi  
E JANNED ha guin ru,  
Hac o combati  
A vouie cregi dru.



E creis ar gombat  
E comzas evellen :  
» Dalc'hit ho lagad  
» Var va flumachen ven,  
» Sus eo d'o laqat  
» Bepret er guir rouden. »



HERRI a garrie  
An dud divar ar mēz,  
Hac a reqete  
M'o dije bep sulvez  
Yaf er pod deze  
Da zebri en o ez.

8



**HERRI-PÊVARE**

N'en deo get maro c'hoas,  
Rac e Vugale  
E lignes hac e raç  
Zo leun a vue :  
Graç deo da chom mil bloas.



Mar distro bien  
An diaoul da choari vas,  
Prest omp da zouten  
Ar Roue en e blaç,  
Ha prest ha laouen  
Da rei p'eb a dol bas.

**FIN.**



**E MONTROULEZ, e ti LEDAN, e traon ru ar Vur.**